

AR REPUBLIK GAOUIAD

Ar republik a zo gaouiad,
Tad ar gevier a c'he he zad;
Gevier hi a laro bepred
Evit bourda ar re a gred.

Laret a ra d'ar voterien
Vezo marc'had mad ann hollen,
Ar butun hag ar guin-ardant
Vo evit neubeut a arc'hant.

Hi lavar d'ann artizanet
Penez e vezont wel beet,
Ha kavet neubeutoc'h a boan;
Evuruz vezo bep unan!

Hi lavar ho po liberte!
Ia! da gât naon noz ha beurre
Gant ho pugale a vandenn,
Ma c'heuz nemet-he d'ho soutenn.

Ar re oa skanvik ho brago,
Vit sevel ezet er c'hargo,
Deuz kavet brema ar voyen
Da laret c'hint *republiken*.

Brezel a reont d'ar plaso;
Lampat a reont er c'hargo :
Evel brini n'eur parkad ed
War ar Frans kez e c'hint koeet.

Ar plaso na vont ken roet
Nemet d'ar republikanet;
Kredet hardi hi deui a-benn :
D'he ar c'haouled, dec'h ar c'heujen.

Gwechall lerer oa despotet,
Gwelet a ran a zo bepret!!
Ann despotet koz oa ezen
En kichen ar re zo o ren.

Evel Turket e kommandont,
Zodi ann dud kez a reont :
Ann dud honest zo er plaso
A gren brema 'n'ho oll vembro.

Vel piz er pod e vent kasset
Skuiz e ho diou c'har o redek,
Ha goullou deu ho godello
O redek pevar c'horn ar vro.

Gant-he man 'r ialc'h hag ann arc'hant
Da rei d'ar re ho devo c'hoant;
Ma ne zoc'h ket *republikan*
Vezet laket er paë bihan.

Ren ar Republik, eme-z-ho,
E loden neubeuta hon bro;
Ze a zo ezet da gompren :
Ann oll blaso zo d'he a-greun.

Ann ter loden all a c'hallou
Huanadi ha skuill daëro;
N'ho devo ken man da ober,
Ma deve peuc'h, ze a vo kaer.

Kalz a draou a vo da baea
Ha potred treud vo da larda;
P'ho devo oll gret ha disc'hret,
Ni a baeo ar gwer torret.

Frans na n'eo ken d'ar Fransijen :
War-n-hi man bep distaoladen;
Ha Frans d'ar re-ze n'eo netra,
Gant ma kresko ho feadra.

Na c'houlter ken a gouencho,
(Skuiz ver' o klewet pedenno.)
Na kenneubeut euz ar frerien
Zo gant-he skol vad ha kristen.

Ann dud gwe ansao eun Doue,
Bep rum ann-he en euz he fe;
Allaz! ar republikanet
N'ansavont ken Doue ebet.

Arme, justis ha beleien
Laka ann-he da goll ho fenn;
Troet ho deuz ho c'harante
War-zu ann touerien Doue.

Pa na gar ket ann den Doue,
Piou a fell dec'h-hu e garfe?
En em garet ra e-unan,
Wit ar re all dâl ket ar boan.

Ar levrio fall, ar c'heloio
Ho deuz ampoezonet ma bro;
Ar skolio fall a deu goude
Da vouga Frans enn beo-bue.

Eur potr koz fin, Thiers, a lare
D'ann oll deputeet eun de :
Ar republik pell a bado,
Ma n'ra ket re a sotizo.

Pell zo braz e man o c'hoari
Gant hon danve dindan hon fri;
Mouga e rei ar liberte,
Hag ar goad a redo goude.

Laret a rer e fineomp;
'Re goz oa finoc'h evidomp :
Hi a glaske kavet tra vad,
Ha ni gant bep sort a ra stad.

Allaz! hirie eo red kompta,
Ar vadelez dal ken netra;
Mado, skiant, madobero
Vo laret de-z-he : harao!

Dek pillauer enn eur c'hoste,
Nao den gwiek enn egile;
Ar stouperien a gommando
Pa zigoueont dek eneb nao.

Man *republik* enn malarje
Ar c'hoarais a deuiou goude.
Diez vo d'ar *republiken*
Ma ve red ober pinijen.

Gwech all a oa ann drapo gwenn,
Hirie tri liou enn he gerc'hen!
Darn a c'houlenn ann drapo *ru*,
Goude deui prim ann hini *du*.

Da dougen kanvo d'hon bro gez!
Fransijen, ruiet gant ar vez!
Ankoeet ho c'heuz ho Toue,
Ha losket enn awel ho fe!

Ar Frans prestik a zivevo
A welo sklaer he fapero,
Hag a zistroio euz Doue
Da vean euruz adarre.

ERVOAN HERNOT.